



KENVREURIEZ AR BREZONEG



T A O L E N N

K A I E R 26

Kendelher a reom gand al levr-overenn (Pedennou,prefasou,lidou)...

Ahend-all e lakom overenn Santez Têrêza ar Mabig Jezuz,o veza m'ema
er bloavezh 1973,kantved loavezh he ginivelezh.

Siwaz ! al LEVR B en e bêz ne vo prest nemed evid ar Horaiz,setu perag
eh embannom,e fin ar Haier ar 7 overenn "war ar bloaz " a vo lidet,araog ar
Horaiz.Met pa weloh peseurt kaer a levr e vo al LEVR B,n'ho po ket leñ da
gaoud diêz da veza gertozet.

+++++

I. - LEVR-OVERENN (pedennou,prefasou,lidou...)

9 ved sul war ar bloaz.....	33
pevare sul ar horaiz.....	34
pemped sul ar horaiz.....	34
gouel Jezuz kaset d'an Templ.....	35
gouel santez Têrêza ar Mabig Jezuz.....	37
sul ar bleuniou hag ar basion.....	40
gouel sant Jozef.....	44

II. - AL LEMNADENNOU evid ar zuliou war ar bloaz

IIed sul war ar bloaz.....	48
IIIed sul war ar bloaz.....	50
IVed sul war ar bloaz.....	52
Ved sul war ar bloaz.....	54
VIed sul war ar bloaz.....	55
VIIed sul war ar bloaz.....	57
VIIIed sul war ar bloaz.....	59

+++++

Goulennit:

KOMZ DOUE EN OVERENN : LEVR T (30 lur)

KOMZ DOUE EN OVERENN : LEVR B

digand :Job- Seite - Skol an Aod - 29249 GUISSENY

C.C.P. 1738 - 66 - Rennes

Kourmant : 15 lur

BREZONEG PE GET EN ILIZ-PARREZ ?

A-du: 82 dre gant ,a-eneb: 17,9 dre gant...

D'an I2 a viz meurzh 1965,e oa bet embannet war ar "SEMAINE RELIGIEUSE e tri eskobti,Kemper,Sant-Brieg ha Gwened,aliou war an implij da ober el lidêrêz euz ar brezoneg.

Lavaret eoa bet goulenn aviz an dud fidel,e doare pe zoare,araog divizoud.

Setu amañ eur barrez diwar ar mêz.An Aotrou Person a zo c'hoanteet gantañ anaoud sonj e barrezioniz,war eun nebeud kudennou euz buez ar barrez.Ugent goulenn a oa war ar follenn enklask.Unan anezo a oa dibunet evel-henn:

" Ha c'hoant ho-peus da gaoud overennou e brezoneg ?"

266 follenn-enklask a zo bet respontet dezo.

15 ne lavaront netra war ar poent-se.

45 n'emaint ket a-du ha,tra souezuz ! 8 anezp a zo etre I3 ha 30 vloaz, 37 etre 30 ha 80 vloaz,meur a hini oajet braz.

206 a zo a-du,da vianna eur wech ar miz:

50 etre I3 ha 30 vloaz

156 er 'u all da 30 vloaz.

En oll 17,9 % a-eneb

82 % a-du.

ha c'hoaz ma ne vez kemeret nemed AR RE YAOUANK,euz a I3 da 30 vloaz ,e kavom: a-eneb,I3,7 % hag a-du , 86,3 % .AR RE YAOUANK EO A ZO AR MUIA A-DU.

Un dra bennag a zo cheñchet.Deg vloaz 'zo ne vefe ket bet ken uhel an dre-gantad a-du.

Eur wech ar miz,da gemañs,hag eun overenn war deiz. N'eus ket leh da zén da veza feulet.Beteg-henn ne veze dalhet kont ebéd euz ar re o-defe kavet gwelloc'h kaoud overenn e brezoneg ,ha ne lavaront gêr,dre zoujañs.

Bremañ eo d'ar yaouankizou poania evid ma vo plijuz d'an oll an overennou e brezoneg,plijuz ha frouezuz.Eul laz-kana a zo êz dezo da êz dezo da zevel ma karont evid rei lañs da gan an ilizad a-bez.Sur on e teuio tud euz ar parrezioù tosta da zikour,da hortoz m'ho devezo -inti ivez - overenn e brezoneg en o farrez o-unan.

Alo ! Buan eun enklask evel honnez en oll barrezioù diwar ar mêz hag e vo dinehet meur a berson a zo o klask gouzoud pe hent kemer. Lod parrezioù euz or hêrioù a zeuio da heul.

A-benn bremañ,on-eus 80 parrez hag o-deus bet,gwech pe wech overennou e brezoneg; araog bloaz amañ,cn-do daou gementad !

K. ar B.

AR BLOAZ KRISTEN

NAVET SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...
Aotrou Doue, on Tad, ouzoh eh en em erbedom,
gand fizians, rag morse ne faziot en ho menozioù:
pellait kement tra 'ra droug
ha roit deom ar pezh a hell or skoazella.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Leun a fizians en ho karantez, Aotrou Doue,
e teuom d'hoh aoter, gand or provou:
ra vim dre nerz ho kras glaneet er Zakrifiz a lidom.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR KOMUNION

PREFAS AR ZULIOU : p. 20 ha 21

Pedom...
Hentchit ahanom, Aotrou Doue, dre ho Spered,
c'hwi ho peus roet deom Korv ha Gwad ho Mab:
grit deom gelloud rei testeni ouzoh,
n'eo ket hebken dre gomzou,
med ive dre on oberou;
hag e hellim neuze mond e diabarz Rouantelez an Neñvou.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

AR HORAIZ (kendalh)

PEVARE SUL AR HORAIZ

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, dre ar Zalver, ho Mab, c'hwi 'ra ken kaer tra
ma 'z eo renta d'an dud ar peoh ganeoh-c'hwi;
grit, ni ho ped, ma poanio pobl ar gristenien,
gand feiz beo ha karantez birvidig,
d'en em brepari evid gouelioù Pask, bremañ e tostaad.
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR PROVOU

A galon laouen, Aotrou Doue, e kinnigom deoh
Sakrifis ar Zilvidigez peurbaduz,
hag ho pedom d'or zikour d'adori, gand feiz, ar Zakramant,
ha da lida an Overenn, evid Silvidigez ar Bed.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS PEVARE SUL AR HORAIZ

E gwirionez...dre Jezuz Krist,Or Zalver.

Eñ e-neus digaset gouenn an dud,o kerzed,reuzeudig,en deñvalijenn,
da sklerijenn ar feiz,en eur gemer natur mab-dén;
ha pa oant sklavourien d'ar pehed,o tond er bed,e-neus grêt anezo bugale deoh,
dre vertuz dour ar Vadiziant,mammenn ar Vuez Nevez.
Setu perag emañ ho krouadurien euz an Neñv hag euz an douar,
o kana eur hantik nevez,en eur stoui dirazoh,gand doujans;
ha ni ivez,gand an oll êlez,a embann ho meuleudi,
en eur lavared da viken:

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue,
c'hwi hag a skuill sklêrded war gement dén a zeu er Bed,
plijet ganeoh sklerijenna or halonou,gand splannder ho kras,
ma vo bepred or zonzou mad da blijout deoh,
ha gwirion or harantez.
Dre Jezuz Krist,Or Zalver. AMEN !

PEMPED SUL AR HORAIZ

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue,grit deom ^{kompren} gand pebez karantez evid ar bed,
eo eet ho Mab beteg gouzañv ar maro;
ha dre zikour ho kras,
grit deom beva a wir galon,er memez karantez.
Dre Jezuz Krist,ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Selaouit or pedennou,Doue oll-halloudeg,
ha grit d'ho servicherien sklerijennet ganeoh,
war ar Feiz kristen,
beza gwalhet o ene dre vertuz ar Zakrifis-mañ.
Dre Jezuz Krist,Or Zalver. AMEN !

PREFAS (gweloud ar zul genta :pajenn 27)

(ma 'z eo lennet aviel Lazar,ar prefas-mañ:)

E gwirionez...dre Jezuz Krist,Or Zalver.
Eñ hag a zo gwir dén,e-neus skuillet daelou war e vignon Lazar,
hag eñ,Doue Peurbadel,
e-neus grêt dezañ sevel beo euz ar béz;
eñ c'hoaz,leun a druez ouz gouenn an dud,
a zoug ahanom d'eur vuez nevez,dre o zakramañchou santel.
Drezañ oh adoret gand an oll Êlez,laouen dirazoh da viken,
hag e fell deom unani or moueziou evid ho meuli,
en eur lavared gand kén braz levenez:

GOUDE AR GOMUNION

Roit deom ar hras,ni ho ped,Doue oll-halloudeg,
da jom bepréd izili beo d'an Aotrou Krist,
a resevom e Gorv hag e Wad,er Zakramant.
Drezañ,On Doue beo,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

GOUEL JEZUZ KASET D'AN TEMPL (2 a viz c'hwevrer)

pe gouel ar Chandelour

Daou-ugent deñvez goude ginivel-z Jezuz, ar Werhez Vari, doujuz da hour-hemennou ar Lezenn, a ya d'an Templ da ober al lidou hag ar pedennou merket. Kinnig a ra he Mab da Zoue. An den koz Simeon, roet dezañ da houzoud gand ar Spered Santel e oa ar bugel-se ar Mesiaz prometet, a gemer anezañ etre zivrec'h hag a lavar ez eo Sklerijenn ar bed.

LID AR GOULOU

Stumm kenta (pa vez prosesion)

1. D'an eur merket, en eur japel pe en eun leh deread beunak, en diavêz d'an iliz ra 'z ay ar brosesion enni, eo bodet an dud fidel, beb a houlaouenn goar ganto, med dielum.

2. Dond a ra ar beleg (hag ar re a zo ouz e zervij), gwisket e gwenn evel evid an ovedenn; nemed e leh ar gazulenn, e hell kemer ar hab (chape), beteg ma vo echu ar brosesion.

3. Epad ma vezer oh elumi ar goulou koar, e vez kanet. Da skouer an antivonenn:

"Ema an Aotrou, on Doue, o tond gand galloud braz,
hag e sklerijenno daoulagad e zervic'erien. Alleluia !"

4. Ar beleg a zalud ar bobl evel boaz ha goude-ze, eñ, pe eul lener, a ro eur gentel diwar/benn al lid emeur oh ober.

Ar gentel a vo evel-henn pe en eun doare dem-heñvel.

"Va breudeur ker, daou-ugent deñvez a zo on-eus grêt, gand levenez, Gouel Ginivelez or Zalver. Emaom, hirio, da geñver an deiz evuruz m'eo bet ar Mabig Jezuz digaset d'an Templ; da weled eo oa grêt kement-se evid senti ouz al Lezenn, med, e gwirionez, edo dija ar Zalver, o tond en arbenn d'an dud a gred ennañ. Ouspenn-ze, en deiz-se, ez eus deuet d'an Templ tud koz, evel Simeon hag Anna.

Gand ar Spered Santel, eo cant bet poulzet da zond; sklerijennet gantañ, o-deus anavezet ar Zalver hag embannet e veuleudi en eur dridal laouen. Ha ni, d'on tro, unanet amañ, dre ar Spered Santel, kerzom da di Doue, en arbenn d'Or Zalver. E gavoud a raim bepred hag e anaoud, e Sakramant ar Bara torret ha roet da zebri, da hor-toz e Zistro leun a hloar.

5. Goude ar gentel, ar beleg a vennig ar goulaou, en eur lavared:

1/Pedom...

ha Mammenn

Aotrou Doue, Krouer hag Eienenn peb sklerijenn, da geñver an deiz-mañ, ho-peus roet da weled d'an den santel Simeon, an Hini 'zo Sklerijenn deuet da sklêria an oll boblou;

ho pedi a reom a greiz kalon:

Plijet ganeoh benniga ar goulaou koar-mañ

ha digemer, er memez amzer, pedennou ho pobl fidel,

diredet amañ evid dougen ar goulaou-ze, en enor deoh;

grit ma kerzo gand hent ar vertuziou,

beteg ar sklerijenn beurbaduz.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

2/Aotrou Doue, c'hwi ar wir Sklerijenn, mammenn ar Sklerijenn a bad da viken, skuillit e kalonou ar gristenien sklêrded ar sklerijenn-ze, ne varvo ket, ha roit d'ar re a gerz d'ho Templ Santel, e-kreiz ar sked euz ar gouleier-mañ, ar hraz da gerzed beteg splander ho kloar.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

Stranka
Skuill a ra dour benniget war ar gouleier hel lavared netra.

6/Neuze e kemer ar beleg ar houlaouenn miret evitañ hag e lak ar brosesion da lo-ha, en eur lavared a vouez kreñv:

Kerzom war araog e peoh da ziambroug or Zalver !

7/Ekerz ar brosesion, e kaner Kantig Simeon (pe eur han all a zoare)

Diskan: Sklerijenn da sklêria an oll boblou
ha gloar evid Israel ho pobl.

Luk. 2/29-32

29. Bremañ, o Mestr, lezit ho servicher
da vond kuit e peoh, hervez ho lavar.

30. Rag gwelet o-deus va daoulagad ho silvidigez,

31. ho-peus prepaet dirag an oll boblou;

32. sklerijenn da sklêria an oll boblou
ha gloar evid Israel, ho pobl.

Gloar d'an Tad, ha d'ar Mab, ha d'ar Spered Glan,
d'an Doue a zo, a vo hag a zeu
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

Stumm daou:

Pa ne vez ket greet prosesion ar mêz euz an iliz, an dud en em vod e diabarz an iliz, o gouleier koar en o daouarn. Ar beleg ouz e heul eun nebeudig tud fidel, a ya d'al leh a zigouez ar gwella, pe dirag an nor, pe e diabarz an iliz, e leh ma hello an dud kemer perz el lid.

Pa vez erruet beteg eno, eh elumer ar gouleier hag e kaner ~~LUMEN~~ CHRISTI, pe eur han all.

Goudeze, evel an n° 4-5, salud ar beleg, kentel, bennigadenn ar gouleier, prosesion warzu an aoter. N° 6-7 etc...

AN OVERENN

Echu kan an digor, e-ser mond warzu an aoter, ez a ar beleg d'e gador hag e kan ar GLORIA IN EXCELSIS. N'eus na pedenn a binijenn na Kirie, en deiz-se.
An dud fidel a zall o gouleier war elum beteg fin an Aviel.

An Overenn a vo kavet el LEVR T pajenn 79.

PEDENN AN DIGOR

Pedom... Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
ho pedi a reom a greiz kalon,
en deiz m'eo bet kinniget deoh en Templ ho Mab Unganet, kemeret gantañ or atur-den;
grit deom ivez lakaad glan on ene, evid beza e stad da veza kinniget deoh
Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

War AR PROVOU : Plijet ganeoh, Aotrou Doue, selaou hor pedenn, hag, evid ma vo din
ahanoh ar Brovadenn-mañ a ginnigom deoh, roit deom skoazell ho
karantez. Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS: E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,

C'hwi, Tad Santel, Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
rag ho Mab karet, beo ganeoh a oll viskoaz,
pa 'z eo bet doouget d'an Templ, da genver an deiz-mañ,
a glevom a-berz ar Spered Glan, o tiskleria
ez eo Gloar Israel ha Sklerijenn ar Poblou.
Setu perag ez eom gand levenez en arbenn d'ar Zalver a zigasit deom,
ha gand an Elez hag ar Zent,
e kanom ho meuleudi, en eur lavared:

GOUDE AR GOMUNION : Pedom asamblez...

Dre ar Zakramant on-neus resevet, Aotrou Doue,
peurechuit ennom labour ho kras. Evel m'ho-peus roet da Zimeon ar joa a hortoze
da weled ar Zalver araog mervel, Grit deom ivez^{na} mond en arbenn d'an Aotrou Krist
ha gounid ar Vuez Peurbaduz. En hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

GOUEL SANTEZ TEREZA AR MABIG JEZUZ (Ia a viz here)

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, c'hwi hag a zigor ho rouantelez
 d'ar vugale ha d'an dud izel a galon,
 roit deom ar hras da vale war roudou Santez Têrêza,
 ma vo, dre he skoazell, diskouezet deom sklêr ho kloar peurbadel.
 dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo braz meurbed,
 roet ho-peus grasou kaer da Zantez Têrêza,
 ni ho ped, pegwir eo plijet deoh he meritou,
~~grit~~ deom ar hras da zougen poaniou ar vuez-mañ.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR KOMUNION

Aotrou Doue, grit ma teuo ar Mister divin-mañ
 da entana or halonou euz an tan a boulzas Santez Têrêza
 d'en em ouestla da aberz a garantez.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

KANTIK DA ZANTEZ TEREZA AR MABIG JEZUZ. gant Fañch Gwegen - Skaer, 30/8/1928

Diskan:

Têrêza 'r Mabig Jezuz, o leanez santel,
 lilienn hlan diwanet e liorz ar Harmel,
 ni, bugale Breiz-Izel, a zired gand dudi
 dirag hoh imaj (skeudenn) santel d'ho meuli, d'ho pêdi.

1. Evel eur vleunienn dener, digoret d'ar beure,
 a re c'hoez vad eur pennad hag a glaz adarre;
 berre eo bet ho tefveziou, med puill hoh oberou;
 setu perag an Iliz a zav deoh aoteriou.

2. Gwerhez izel a galon, kuzet el leandi,
 hirio, c'hwi 'zo en neñvou lugernuz o skedi.
 Na c'hwi 'zo kaer hoh ene, merh an Aotrou Doue!
 Na c'hwi 'zo braz ho kalloud, war galon ar Roue!

3. War ar gliz euz ar goabrenn, da 'n douar skarnilet,
 grascou an Aotrou Doue, dre ho torn 'zo skuillet;
 piou a hellfe niveri hoh oll vadelezoù,
 an eneoù gounezet dre nerz ho pedennou.

4. Tereza, piou n'ho karfe, o kleved ho mennoz:
 "oh ober vad d'ar bed-mañ, tremen va baradoz"?
 Ni a houlenn ho skoazell evidom hag or Bro,
 ar Vretoned hoh erbed, selaouit-i d'o zro!

5. Goulennit bennoz Doue war an tiegeziou;
 ra vo miret e Lezenn, e kêr, war ar mêziou.
 Ra vevo 'n oll briejou ar garantez santel,
 o c'hoarzin d'eun el bian kousket en e gavell.

6. Roit deom kalz beleien ha kalz leanezed,
 da skigna Lezenn Doue, dre bevar horn ar bed,
 d'an dud paour ha reuzeudig 'zo en deñvalijenn,
 ma paro war an douar d'an oll ar sklerijenn

7. Hag e baradoz Doue, ni oll en em gavo, /en ho kichen, Têrêza, ganeoh, ni her meulo.
 Eno labour na skuizder, eno poan nag anken, /med gand an Dreinded Santel eürusted
 da viken.

GOUEL SANTEZ TEREZA AR MABIG JEZUZ

LENNADENN GENTIA

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS 66/10-14c

- IO. Bezit laouen, a-unan gand Kêr-Jeruzalem;
ablamour dezi, tridit gand levenez,
c'hwi oll, he mignoned !
Ya, tridit gand al levenez, asamblez ganti,
c'hwi oll hag a zouge kañv dezi;
- II. c'hwi a vezo maget ganti beteg kaoud ho kwalh,
ouz he feultrin, mammenn a frealzidigez,
ha dudi ho-pezo o terri ho sehed gand he gloar en he haer.
- I2. Rag evelhen, e lavar an Aotrou Doue:
- Emaon o vond da gas dezi ar peoh, evel eur stériad dour,
ha pinvidigez ar broadou, evel eur froud lammet dreist he glannou,
ha c'hwi a vo evel ar vugaligou douget war vreh o mamm
ha flouriget war he barlenn;
- I3. evel eur hrouadur frealzet gand e vamm,
me ho frealzo ha frealzet e vezoh e Kêr-Jeruzalem.
- I4. C'hwi a welo kement-se hag ho kalon a vo el levenez,
en hoh eskern e savo buez nevez, evel er geot fresk,
hag an Aotrou Doue a ziskouezo nerz e zorn d'e servicherien.

SALM I30

I, 2, 3

Mirit va ene e peoh,
en ho kichen, Aotrou Doue !

- I. Aotrou Doue, n'eo ket otuz va halon,
na faeüz va daoulagad,
ne glaskan ket ober traou braz,
na burzudou dreist va galloud.
2. Mired a ran va ene er peoh hag er sioulder.
Evel eur bugelig goude dena, tamolodet ouz e vamm,
evel eur bugelig, goude dena, ma va ene em hreiz.
3. Esperoud a ra Israel en Aotrou Doue,
bremañ ha da viken.

EIL LENNADENN - Doue, an Tad, a ra ahanom e vugale dre ar Spered Santel.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN ROM (8/14-17)

- I4. Va breudeur, an dud a vez renet o buez gand Spered Doue,
ar re-ze oll a zo bugale da Zoue.
- I5. M'ho-peus resevet ar Spered, n'eo ket evid ober ahanoh c'hoaz,
e-keñver Doue, servicherien o krena gand aon;
med resevet ho-peus eur Spered hag a ra ahanoh
bugale digemeret e famill Doue,
ar Spered a laka ahanom da grial dezañ: "Abba ! Tad !"
- I6. Ar Spered Santel e-unan a ro testiñ d'or spered-ni ez om bugale da Zoue.
- I7. Neuze 'ta, ma 'z om e vugale, ez om ivez heritourien d'e vadou,
heritourien da Zoue, hogen heritourien a-unan gand an Aotrou Krist,
pegwir a-unan gantañ on-eus da houzañv er poaniou,
evid mond a-unan gantañ e gloar Doue.

ALLELUIA

Alleluia ! Me ho meul Doue an Tad, Mestr ar Bed
da veza roet da anaoud d'ar re vian misteriou ho Rouantelez. Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. 18/I-4

1. An diskibien a dosteas ouz Jezuz hag a lavaras:
- Piou eo, a zonz deoh, ar brasa e Rouantelez an Neñvou ?

2. Ha Jezuz o helver eur bugel bian,
a lakas anezan en o hreiz hag a lavaras:

3. - E gwirionez, m'hen lavar deoh,
ma ne deuit ket da jeñch buez,
ha da zond da veza heñvel ouz bugale vian,
ne deoh ket tre e Rouantelez an Neñvou.

4. Evel-se eta, an neb a zeuio da veza izel a galon
revel ar bugel-mañ,
~~a zo~~ ar brasa e Rouantelez an Neñvou.

0000000

VA DALHIT, VA DOUE !

Va dalhit, va Doue, fiziañs am-eus ennoh,
c'hwi a zo va Aotrou. Eurvad ebed hebdoh.
Ar zent a vev em bro a zo va gwir vistri,
aketuz on bepred d'o zelaou, da zenti.

Kreski a reont dalhmad o foan hag o anken,
ar re a gerz da heul falz doueou estren.
Ne din ket evel do d'en em walhi er gwad,
ne din ket d'o meuli. Re druezuz o stad.

An Aotrou va leve ha va halir ive,
he derhel a ray din va lodenn a leve !
P'eo bet tennet ar plouz nag ez on bet laouen,
o ! ya ! na penen kaer eo din-me va lodenn !

Bennoz deoh, va Doue, evid ho kuzulioù,
zoken epad va housk, me a gan ho psalmou.
Bepred emaoñ aze, e va hichen, Doue,
evid va skoazella. Me ne gouezin morse.

Va halon zo laouen, a drid a levez,
ha va horv e unan a ziskreiz heb enkreiz,
rag C'hwi ne lezot ket va ene d'en em goll,
o tra ! C'hwi en dalho eneb an avel foll.

C'hwi a zesko din-me hent fur ar wirionez,
ganeoh eo e kavin da viken ar vuez.

MAB AN DIG 1973

0 0 0

1. En deiz-mañ, eo bet antreet Mab an dên e kêr Jeruzalem, evid seveni Mister e Bask, da lavared eo e Varo hag e Adsao da Veo. Bag-se en oll overennou, e tleer digas da zonj euz an donedigez-se: araog an overenn vrasa, gand ar brosesion pe gand an antre solanel, en overennou all, gand an antre plên. Evelato, en overennou all-se, ma vez eun niver braz a dud, e heller ober c'hoaz un antre solanel, med ar brosesion ne vo ket grêt, eun eil gwech.

A. - AL LID GAND PROSESION

2. Erruet an eur, eh en em ^{Vod} gav an dud el leh merket, en diavêz d'an iliz, bodou palmez, beuz pe lore, en o daouarn.

3. Ar beleg, gand ar re 'zo ouz e servicha, a zigouez eno ive, gwisket evid an Overenn, gand dillad ruz.

4. Da zigeri al lid, e kaper an antivenenn-mañ pe eur han all:

Hozanna 'vid Mab David ! Benniget an Hini a zeu en ano Doue !

Roue Israel eo ! Hozanna e barr an neñvou !

5. Salud ar beleg d'ar bobl ha kentelig diwarbenn ar Gouel, evelhenn pe demheñvel:

Va breudeur kêr, epad ar Horaiz-mañ, on-eus renevezet or halonou, dre ar bedenn, ar binijenn hag an oberou a garantez. Emaom amañ, hirio, unanet gand an Iliz a-bez, evid digeri ar Zizun Zantel, a lidom enni Mister braz Pask Or Zalver.

Araog peurechui ar Mister-se euz or zilvidigez, o vervel war ar groaz hag o sevel beo euz ar béz, Or Zalver a zo bet antreet gand lid braz, e kêr-Jeruzalem. An donedigez-se a lidom bremañ adarre, evel beb bloaz. Gand feiz ha gand gwir garantez, ^{Kerz} ni a gerzo da heul Jezuz Krist: unanet gantañ en e Varo, e kavim on lod ivez en e Adsao da Veo hag en e Vuez Nevez.

6. Ar bedenn war ar bobl a lavara goudeze (unan euz an diou-mañ)

A/ Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, plijet ganeoh + benniga ar bodou hag ar skourrou-mañ; goud e m'or-bo kerzet laouen da heul Jezuz Krist, Or Roue, grit deom mond gantañ beteg Jeruzalem ar Baradoz.

En on Doue Beo ha leun a hloar, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

B/ Pedom Doue...

Lakit da greski, Aotrou Doue, feiz an dud a esper ennoh, ha selaouit en ho madelez ar pedennou a reont a wir galon: ni hag a zo, hirio, o tougen palmez ha bodou lore en enor d'Or Zalver, grit deom digas frouez on oberou mad, o chom unanet gantañ bepred. En on Doue beo ha leun a hloar, a oll viskoaz da vir viken. AMEN !

7. Neuze e lenner aviel donedigez Jezuz da Jeruzalem.

Jezuz, o tond da Jeruzalem, gand prez ha gand levenez vraz, a zo eur skeudenn euz e zistro, leun a hloar. Eun devez, ma plij gand Doue, ez aim d'e heul da Gêr-Jeruzalem an Neñv.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK

II/I-IO

Jezuz, gand e ziskibien, a zo en hent evid gouel ar Pask.

1. Pa 'z int deut tost da Jeruzalem, sko ouz Betfaje ha Betani, dirag Menez an Olived,

Jezuz a gas daou euz ziskibien, en eur lavared dezo:

2 - It d'ar vourhadenn a zo dirazoh; kerkent hag eet e-barz, e kavot eun azen yaouank staget, ha n'eus bet dên c'hoaz azezet warnañ.

Distagit anezañ hag hen digasit ganeoh

3. Ma houlen unan bennag ouzoh: "Petra rit aze ?"

Respontit: "An Aotrou e- neus ezomm anezañ."

ha dioustu e lezo anezañ da zond ganeoh.

4. Mond a reont eta hag e kavont eun azen yaouank stag e kichen eun nor, er-mêz euz an ti, hag e zistaga a reont.

5. Tud a oa eno, hag e houlenmont ouz an diskibien:

- D'ober petra e tistagit an azenig ?

6. Int a respont evel m'e-neus lavaret Jezuz
hag e lezer anezo da ober.
7. Digas a reont an azen yaouank da Jezuz,
o mantilli a daolont war e gein,
ha Jezuz a azez warnañ.
8. Kalz tud a led o mantilli war an hent,
ha lod all bodou trohet ganto er parkeier.
9. Ar re a gerze araog,koulz hag ar re a zeu war-lerh,a youh a bouez penn:
" Hozanna ! Benniget an hini a zeu en ano Doue,on Tad !
Hozanna e barr an Neñvou ! "

Hleh an aviel-mañ,e heller kemer:

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT-YANN I2/I2-I6

12. En amzer-se,an niver braz a dud deut evid gouel ar Pask,
p'o-deus klêvet ema Jezuz o tond e kêr-Jeruzalem,
13. a gemer bodou palmez hag a gerz a bennhent dezañ;
youhal a reont a bouez penn:
- Hozanna ! Benniget an Hini a zeu en ano Doue,Roue Israel eo !
14. Kavet e-neus Jezuz eun azen yaouank,hag azezet eo warnañ,
hervez ma verk ar Skritur Zakr:
15. - Bezit dineh,merh Sion:setu da Roue o tond,
azezet war ebeul eun azenez.
16. Kement-se n'eo ket bet intentet gand an diskibien war an taol;
med goude m'eo bet savet Jezuz d'e hloar,
ez eus deut sonj dezo e oa skrivet an traou-se diwar e benn
hag e oa bet grêt evitañ evel ma oa merket.
8. Goude an aviel e heller ober eur prezegenn verr.Neuze,ar beleg a lak ar bro-
sesion da loha,gand eun ali,evel hemañ,pe komzou heñvel:

Va breudeur kêr,d'on tro bremañ,groom da Jezuz kên braz enor ha m'o-doa
grêt tud an amzer-se,e Jeruzalem.Deom en hent war-lerh ar groaz !
9. E penn ar prosesion,e kerz ar groaz.Da genta war e lerh,e teu ar beleg hag
ar re 'zo ouz e servicha,ha goudeze ar bobl.
Epad ar brosesion,e kaner ar pez a zo merket amañ pe kanou all:

ANTIVONENN I (gand ar salm 23,dreist-holl ar gwerzadou 7-I 0)

Bugale an Hebreed,bodou olivez ha palmez en o dachuarn,
zo eet a-benn hent d'or Zalver,en eur gana a bouez penn:
Hozanna e barr an neñvou !

DISKAN kinniget evid ar Salm 23 (ton el levr Kant. N°50 pe 76)

Enor ha gloar da Vab Doue,
Jezuz,or Mestr hag or Roue !
Ni 'vo dezañ 'pad or bue.

- 7/ Savit uhel tal an noriou !
Dibradit,doriou peurbaduz,
ma teuo tre 'r Roue a hloar !

9/ (evel ar gwerzad 7)

- 8/ Piou hennez,Roue a hloar ?
An Aotrou eo,kreñv ha dispont,
An Aotrou dispont en emgann.

- 10/ Piou eo hennez,roue ar hloar ?
An Aotrou Doue,Mestr ar Bed,
hennez eo ar Roue a hloar !

ANTIVONENN 2 (gand ar salm 46 - troet evid mont war don Kant. N° 155)

Bugale an Hebreed a lede o mantilli war an hent hag a gane a bouez penn:
Hozanna 'vid Mab David ! Benniget an Hini a zeu en ano Doue !

Salm 46 penn-da-benn.

- 2/ Oll boblou ar bed,slakit ho taquarn,
ha savit ho mouez da veuli Doue.

- 3/ Bez 'eo an Aotrou Mestr doujet peb tra,
Roue braz an douar a-bez.

- 4-5/ Ar broiou a lak da blega dezañ,
poblou an douar 'zo e-harz e dreid.
Ni e-neus choazet 'vid e heritaj,
gloar Jakob.e vuia-karet.

6-7 / Doue 'zav d'an neh 'kreiz eur mor a gan,
 ouz son an drompill, an Aotrou a bign.
 Kanit da Zoue, kanit gloar dezañ,
 kanit oll enor d'or Roue !

8-9/ Roue eo Doue war ar bed a-béz,
 e rouantelez eo an oll vroïou.
 Savit kanou kaer d'an Aotrou Doue,
 azezet war e dron santel.

10/ Mistri ar poblou 'zeu d'en em staga
 ouz pobl Abraham choazet gand Doue;
 e dorn Doue 'ma tud kreñv an douar,
 uhel eo Doue dreist peh tra.

Meuleudi d'an Aotrou Krist (Gloria laus e latin.)

Diskan: Gloar hag enor ha meuleudi deoh, Aotrou Krist, Roue ha Salver,
 ho-peus klevet ar vugale laouen o kana deoh an Hozanna.

- I/ Roue Israel oh-c'hwi, euz lignez brudet David,
 c'hwi ar Roue benniget, o tond en ano Doue.
- 2/ Ho meuli 'ra an oll Elez ha sperejou eüruz an neñv,
 an dud ivez, er bed-mañ, hag an oll grouadurien.
- 3/ Pobl an Hebreed 'zo eet en arbenn deoh gand bodou palmez;
 setu ni bremañ, o tigās deoh pedennou, kan ha meuleudi.
- 4/ Ganto oh bet meulet, p'edoh tost d'ho Pasion;
 pa zeuom-ni d'ho meuli, emaoñ e gloar ho paradoz.
- 5/ An dud-se 'zo bet plijet deoh; ra blijo deoh ivez or harantez,
 Roue mad, Roue trugarezuz, a gar kement tra 'zo mad.

10. Pa dremener an nor da vond en iliz, kemer ar han-mañ pe unan heñvel:

Da heul ar Zalver, o tond e kêr-Jeruzalem, ema bugale an Hebreed,
 oh embann e heñvel Mestr ar Vuez sevel da veo.
 Bodou palmez en o daouarn, e kanont a bouez penn: Hozanna e barr an Neñvou !
 V/ P'o-deus klevet tud ar bobl ema Jezuz o tond e kêr Jeruzalem,
 e kerzont a-benn hent dezañ: Bodoù palmez...

II. Ar beleg a gerz beteg an aoter hag a bok dezi. Ma vez tro d'hen ober, e lak e-
 zañs da vogedi, oh ober tro an aoter. Goudeze, ez a d'e gador ha dioustu e lavar Pedenn
 an Digor, o lezel a-gostez pep tra all euz lidou an digor.

B. - LID AN ANTRE SOLANEL (e diabarz an iliz)

- I2. 'Leh n'eus ket tu da ober ar brosesion en diavêz d'an iliz, e lider donedigez
 or Zalver, gand an antre solanel en diabarz, evel m'eo merket amañ.
- I3. Ema an dud fidel pe dirag an nor vraz, pe en diabarz d'an iliz, bodou pe skourr-
 ou ganto en o daouarn. Ar beleg, gand ar re 'zo ouz e servicha, hag ivez eun toullad
 tud fidel a ya (en diavêz d'ar heur) en eul leh êz awalh evid ma vo gwelet ha klevet
 gand ar peb muia euz an dud.
- I4. Al lid neuze, a zigor evel merket uhelloc'h, N° 4-7, da lavared eo: euz kan an digor
 beteg goude an Aviel. Mond a ra neuze ar beleg, ar groaz en e raog, a-dreuz an iliz bet-
 eg ar heur, tra ma kaner (uhelloc'h N° 10): "Da heul Or Zalver o tond...pe eur han all.
- I5. Evel an N° II: ar beleg a zalud an aoter hag a ya d'e gador da lavared Pedenn
 an Digor (izelloc'h N° 21).

C. - LID AN ANTRE PLËN

- I6. An dra-mañ 'zo evid an overennou all euz an deiz; evid merka ar zoñj euz do-
 nedigez Jezuz da Jeruzalem, e reer an antre plên.
- I7. Tra ma kerz ar beleg etrezeg an aoter, ar bobl a grog gand kan an digor (amañ
 war-lerh, n° 18), pe eur han all, gand menozioù heñvel.
 Ar beleg a bign ouz an aoter hag a bok dezi. Mond a ra d'e gador hag eno e salud ar
 bobl hag ar peurrest evel boaz.

18. KAN AN DIGOR

C'hweh d'ez vez araog gouel ar Pask, p'edo Jezuz o tond e kêr-Jeruzalem,
bugale 'zo deut en arbenn dezañ, gand bodou palmez en o daouarn,
hag a bouez penn, e kanent: Hozanna e barr an Neñvou !
Meuleudi deoh- ~~hwi 'zo deut gand ho karantez ken braz~~ 8

Salm 23/9-IO - gwelit N° 9

19. En ilizou, na reer enno na prosesion nag antre solanel, e vo mad ober, en dia-
vêz d'an Owerenn, ofiz ar Gmz Santel diwarbenn donedigez Or Zalver hag e BASION,
d'an eur a zigouezo ar gwella, da bardaez ar zadorn pe d'ar zul.

AN OVERENN Overenn ar Basion : Leksional T-pajenn 27

20. Evel m'eo bet lavaret dija, e-leh m'eo bet graet ar brosesion pe an antre sol-
anel, ar beleg a lavar diouztu :

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
evid diskouez d'an dud penaoz en em izellaad,
c'hwi ho-peus grêt d'Or Zalver diskenn da gemer on natur-dén
ha gouzañv Maro ar Groaz;
roit deom eta ar hras da gompren kenteliou e Basion,
ha da gaoud perz en e Adsao da Veo.
En on Doue heo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Ho pedi a reom, Aotrou Doue, dre Basion ho Mab karet,
ma teuio beteg ennom ho pardon madelezuz;
daoust ma ne veritom ket anezañ, dre on obercu,
grit deom e reseo digand ho trugarez,
dre vertuz ar Zakrifis n'eus nemetañ.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS

An Aotrou Doue ganeoh / Ha gand ho spered !
Ho kalon d'an uhel ! / Troet eo warzu Doue !
Lavarom bennoz da Zoue, On Aotrou ! Just ha santel eo !

E gwirionez, just ha santel echo trugarekaad,
e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
dre Jezuz Krist, Or Zalver.
En a zo fellet dezañ, *hag En dibek* ~~dibek~~ ma oa, gouzañv evid ar beherien,
ha beza kondaonet, heb beza grêt netra 'fall,
evid ar re o-doa grêt an droug;
e varo e-neus gwalhet or pehejou,
hag e Adsao da Veo e-neus roet deom a-nevez buez ar hras.
Drezañ ema an neñv hag an douar, an êlez hag an arhêlez,
oh embann deoh meuleudi hag enor, heb skuiza morse o lavared:

GOUDE AR GOMUNION

Maget gand ar Zakramant Santel, ni ho ped stard, Aotrou Doue,
dre Varo ho Mab, ho-peus roet deom an esperañs
da gaoud ar pezh na welom ket hag a anavezom dre ar feiz +
grit deom, drezañ adsavet da veo,
mond beteg an termen eüruz a glaskom.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUEL SANT JOZEF (19 a viz meurz)

PEDENN AN DIGOR

Doue oll-halloudeg, c'hwi ho-peus dibabet Sant Jozef,
 evid beza Mirer fidel ho Mab en em hrê den,
 p'edo, en e oad tener, o voulha labour silvidigez an dud;
 roit bremañ d'hoh Iliz, harpet war e bedennou,
 ar hras da genderhel beteg al labour-se fiziet enni.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Ho pedi a reom, Aotrou Doue,
 evel m'e-neus Sant Jozef gouestlet oll nerz e galon
 da zervij ho Mab karet, ganet euz ar Werhez Vari,
 roit deom-ni ivez ar hras da veza glan or halon,
 evid ho serviche bremañ ouz hoh aoter.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS

E gwirionez just ha santel eo, Tad Santel,
 Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 ho 'rugarekaad e peb leh hag e peb amzer;
 En eur enori Sant Jozef, deoh atao e fell deom
 rei gloar ha mil bennoz.
 En oa an den just, ho-peus roet da bried
 d'ar Werhez M'arm da Zoue,
 ar zervicher fur ha fidel,
 ho-peus laket e penn ar Famill Zantel,
 evid diwall, gand karantez eun tad,
 ho Mab Unganet bet konsevet dre nerz ar Spered Santel,
 Jezuz Krist, Or Zalver.
 Drezañ eo, Tad Santel, ez oh meulet,
 gand an Elez hag an holl Zent,
 a 'fell deom unani ganto or moueziou,
 en eur lavared a greiz kalon:

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue, d'ho pugale, laouen oh ober gouel Sant Jozef,
 ho-peus roet magadur diwar an aoter-mañ:
 dalhit anezo, ni ho ped, dindan ho kwarez bepred,
 ha diwallit n'afe da goll an donezonou ho-peus roet dezo.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

troidigeziou aotreet da arnod, evid an
 eskopti a-berz an Aotrou F. Barbu, eskob
 Kemper ha Leon.
 Kemper d'an 10 a viz kerzu 1971

V. Fave; eskob-skoazeller

WAR AR BLOAZ

AN AMZER WAR AR BLOAZ - "per annum"

Iled SUL WAR AR BLOAZ



LENNAD ENN GENTA : Komzit, Aotrou, ho servicher a zo ouz o selaou.

LENNADENN EUZ LEVR KENTA SAMUEL 3/3-9-19.

- 3- Samuel, yaouank c'hoaz, a oa kousket
e santual an Aotrou Doue,
e-leh m'edo arh Doue.
- 4- Doue a halvas "Samuel, Samuel,"
hag ^{hemañ da} ~~hemañ~~ a respontas : "setu me !"
- 5- ~~hag e~~ ^{hag e} redas da gaoud ar beleg Eli,
hag ~~e~~ ^e lavar~~as~~ ^{as} dezañ :
-va galvet ho-peus, setu me !"
Eli da respontas : "n'am-eus ket da halvet.
Kae endro da gousked."
Hag ~~ez~~ ^{er} eas d'e wele.
- 6- Doue a halvas adarre : "Samuel, Samuel !"
ha Samuel ^{sevel} ~~a~~ ^{mond} ~~zavas~~ ^{da} ~~a~~ ^{yaouank} ~~yaouank~~ da gaoud Eli,
hag ~~a~~ ^e lavar~~as~~ ^{as} :
-va galvet ho-peus, setu me !"
Eli da respontas : "n'am-eus ket da halvet va mab,
kae endro da gousked."
- 7- Samuel ne anaveze ket c'hoaz an Aotrou;
ha komz Doue ne oa ket bet
roet c'hoaz dezañ da anaoud.
- 8- Doue a halvas anezañ a-nevez evid an trede gwech.
Hemañ a ^{mond} ~~zavas~~ ^{da} ~~a~~ ^{yaouank} ~~yaouank~~ da gaoud Eli
hag ~~a~~ ^e lavar~~as~~ ^{as} : "va galvet ho-peus, setu me !"
^{Gotid a eas} Eli a ~~e~~ ^euezas neuze ~~eo~~ ^{da} an Aotrou a halve ar hrouadur,
hag ~~e~~ ^e lavar~~as~~ ^{as} dezañ :
- 9- Kae endro da gousked, ha ma vezez galvet e lavari :
-komzit, Aotrou, ema ho servicher ouz ho selaou."
- 19- Samuel a greskas, an Aotrou a oa gantañ,
ha ne lezas da vond da goll
hini ebed euz e gomzou.



SALM 39/2-4^{ab}, 7, 8^a, 8^b-9, 10.

-49

DISKAN. Setu me o tond, Aotrou Doue,
evid ober ho polontez.

- 2- E Doue em-neus lakeet va fiziañs;
troet eo warzu ennon
ha selaouet e-neus va hlemmadenn.
- 3- D'am zenna euz ar puñs,
euz ar vouillenn eo deuet;
lakeet e-neus din va zreid ~~war ar haled~~ *war 'n douar Kaled*
ha startet ~~e-neus~~ va herzed.
- 4- War va muzellou eur hantig nevez;
eur veuleudi d'on Doue.
- 7- Ne blije ~~ket~~ deoh na sakrifiks, na provadenn,
med va diskouarn ho-peus digoret;
ne houlennet na sakrifiks peurlosket, na sakrifiks evid ar pehed.
- 8a- *Bez' am euz lavaret* ~~Houze am-eus lavaret~~ : "Setu me o tond."
- 8b- Skrivet eo el levr diwar va fenn :
- 9- ober ho polontez, va Doue, setu va dudi;
emañ ho Lezenn ~~1/20~~ e goueled va halon.
- 10- Ar helou mad euz ho perz a embannin e bodadeg vraz an dud;
~~ne zallin ket kloz va muzellou~~ Aotrou Doue, her gouzoud a rit.
Kloz ne zallin ket va muzellou !

EIL LENNADENN. HO ~~K~~ORVOU A ZO IZILI AR HRIST.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN ~~KER~~ GORINT 6/13^b-15^a,
17-20

- 13b- Va breudeur, ar horv a zo evid an Aotrou Jezuz,
hag an Aotrou a zo evid ar horv.
- 14- ~~Ha~~ Doue hag e-neus adsavet ar Hrist a varo da veo,
on adsavo, ni ivez dre e halloud.
- 15a- Ha ne ouzoh ket eo ar horvou izili ar Hrist ?
- 17- Tehit diouz an hudurnez. *der*
An oll behejou a hel ~~an den ober~~
a zo ~~efi~~ diavêz ~~efi~~ e gorv;
med gand an hudurnez e peh a-eneb e gorv e-unan.
- 19- Ha ne ouzoh ket eo ho korv
templ ar Spered santel,
a zo ennoh hag ho-peus resevet digand Doue ?
ha n'oh ket perhenn deoh hoh-unan.
- 20- Kér kénafñ oh bet prenet gand an Aotrou.
Rentit eta gloar da Zoue en ho ~~K~~orvou.

ALLELUIA, ALLELUIA

Yn 1/14, 12.



Ar Gomz a zo deuet da veza den
ha deuet eo ~~da~~ jom en on touez.
Ar ~~na~~ oll ^{vi} a reseo anezañ
a-zeuio da veza dreizañ bugale da Zoue Alleluia.

- 35- Antronoz badiziant Jezuz,
edo Yann-Vadezour gand daou euz e ziskibien.
- 36- O veza gwelet Jezuz o vond e-biou, e lavaras :
- setu oan Doue."
- 37- An daou ziskibl a glevas kement-se
hag ^{mond} ~~a veas~~ da heul Jezuz.
- 38- Jezuz a ~~zistreas~~ ^{zistreas} hag ouz o gweled o tond d'e heul e lavaras :
- petra ' glaskit ?" *zellas a-dreñv*
- Hag i da* Respont a ~~rejoñt~~ ^{rejoñt} dezañ :
- rabbi (da lavared eo : mestr)
e peleh emañ o chom ? " *pleh 'maout o chom ?*
- 39- ^{Hag en} Lavared a reas dezo :
- deuit ha gwelit."
- Hag i* Mond a ~~rejoñt~~ ^{rejoñt} gantañ
hag ^{gweled} ~~a veas~~ e peleh edo o chom,
hag ~~a~~ ^{hag} chom ~~lont~~ ^{lont} gantañ en deiz-se ;
Wardro peder eur diouz an abardaez edod.
- 40- Andre, breur Simon-Pèr, a oa unan euz an daou
o-doa klevet Yann Vadezour,
hag ~~a~~ ^a eet da heul Jezuz.
- 41- ~~Digouezoud a reas da genta~~ ^{Digouezoud a reas da genta} gand Simon e vreur ^e ~~figanvez~~ ^{figanvez} da genta.
hag ~~a~~ ^a lavared dezañ
~~E klevet en eus ar Mesiaz~~ ^{E klevet en eus ar Mesiaz} ~~ar Hrist~~ ^{ar Hrist} !
(da lavared eo ar Hrist.)
- 42- Hag ~~a~~ ^a kas ~~a~~ ^a e vreur da gaoud Jezuz ;
o veza sellet outañ, ~~Jezuz a~~ ^{Jezuz a} lavaras ^{Jezuz :}
- ~~Te a zo~~ ^{Te a zo} Simon Mab ~~da~~ ^{da} Yann, out-te ?
~~Te a zo~~ ^{Te a zo} Kefa da ano, da lavared eo mên.
~~Kefa~~ ^{Kefa} (Mên) ~~da ano~~ ^{da ano}.


III° SUL WAR AR BLOAZ



LENNADENN GENTA. Tud kêr Niniv a dro kein d'o buez direol.

LENNADENN EUZ AR PROFED JONAZ 3/1-5,10.

- 1- Doue a gomzas evelhen da Jonaz :
- 2- Sav ! Kae da Niniv, ar gêr vraz, ha ro dezo da anaoud
ar pez a lavarin dit.
- 3- ~~Ha~~ ^{sevel} Jonaz a ~~zavas~~ ^{mond} hag ~~a~~ ^a veas da Niniv hervez lavar an Aotrou.
Hogen, Niniv a oa anezi eur gêr vraz souezuz ^{e oa Niniv},
tri dervez bale-hed dezi.
- 4- ~~Jonaz a antreas enni~~ ^{Antreas enni a reas Jonaz} ^{hag oter} eun dervez bale a reas en eur embann :
~~A-benn~~ ^{A-benn} ~~10 noaz~~ ^{10 noaz} daou ugent dervez ^{ha} ~~ha~~ ^{ha} kêr Niniv a vo distrujet ^{e vo kêr Niniv} !
- 5- Tud Niniv, dioustu a gredas e Doue. ~~Kred e Doue~~ ^{Kred e Doue} ~~Kred e Doue~~ ^{Kred e Doue} a reas dioustu tud Niniv,
Embann ~~a~~ ^a eur yun, ha kemer seier da wiskamant,
euz an uhella d'an izella.
- 10- O weled kement-se, ha penaoz e troent kein d'o buez fall,
~~Doue a~~ ^{Doue a} ~~zavas~~ ^{zavas} ~~keuz~~ ^{keuz} gantañ ^e ~~a~~ ^a ~~zavas~~ ^{zavas} ~~keuz~~ ^{keuz} gand Doue
d'an droug e-noa lavaret e raje dezo,
hag ~~a~~ ^a ~~thomas~~ ^{thomas} heb hen ober.



SALM 24/4^{bc} -5^{ab}, 6-7^{bc}, 8-9.

DISKAN : Warzu ennoh e savan va ene,
va oll fiziañs 'zo ennoh va Doue.

- 4bc- Grit din anaoud hoh heñchou, Aotrou Doue,
deskit din ho kwenojennou.
- 5ab- Grit din kerzed ouz sklerijenn ho kwirionez
ha kelennit ahanon, rag c'hwi eo va Doue Salver.
- 6- Bezit sonj euz ho frugarez, Aotrou, hag euz ho karantez,
rag peurbaduz int (n'eus fin ebed dezo)
- 7- Bezit sonj ahanon,
en abeg d'ho madelez Aotrou.
- 8- Mad ha reiz eo an Aotrou,
rag-se d'ar beherien e tiskouez an hent eeun.
- 9- Rén a ra an dud izel da heulia bolontez Doue,
deski ~~a re~~ d'ar re izel, e heñchou dezañ e-unan

EIL LENNADENN. Ar bed evel m'her gwelom a zo o vond da get.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT 7/29-31.

- 29- Va breudeur, lavared a ran deoh : berr eo an amzer.
ahanta ! neuze, d'ar re o-deus gwreg, beza evel ma n'o defe ket;
- 30- D'ar re a ouel, evel ma ne ouelfent ket,
d'ar re a zo eüruz evel ma ne vefent ket,
d'ar re a bren, evel ma n'o-defe netra dezo,
- 31- d'ar re a denn gounidègèz euz ar bed,
evel ma ne rafent ket.
- Rag ar bed evel m'her gwelon, ^{eman} ~~a ze~~ o vond da get.



ALLELUIA, ALLELUIA, Deuet eo beteg ennoh rouantelez Doue;
Kredit er helou mad. Alleluia.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK 1/14-20.


- 14- Goude ma oa bet lakeet Yann - Vadezour er prizon,
e tenas Jezuz ~~a zeas~~ da Vro-Halile
da embann kelou mad rouantèlèz Doue,
- 15- en eur lavared : deuet ~~hp~~ an amzer d'e boent,
tost ema rouantèlèz Doue,
bezit keuz d'ho pehejou
ha kredit er helou mad.
- 16- O tremen war ribl mor Galile e welas Simon
hag e vreur Andre o taoler o rouejou er mor,
rag pesketerien e oant.
- 17- *Ha* Jezuz ~~e lavared~~ dezo :
"deuit d'am heul, ~~deuit d'am heul~~ pesketerien-tud *a rin ahanon.*"
- 18- Kerkent e tilezont o rouejou evid mond d'e heul.
- 19- Eun tammig pelloc'h Jezuz a welas Jakez, mab da Zebede,
hag e vreur Yann, int-i ivez en eur vag,
o kempenn o rouejou.
- 20- O gelver a reas dioustu.
Neuze, o tilezel o zad gand e vevelien er vag,
~~ez ajont~~ d'e heul.
i mond



LENNADENN GENTA ... ~~Me a lakaio da zével~~ eur profed, ~~ha lakin da zével~~,
ha va homzou ~~alakin war~~ e vuzellou.

LENNADENN EUZ LEVR AN ADLEZENN. (DEUT. 18/15-20)

- 15- Moizez a lavaras da bobl Israel :
- "an Aotrou ho Toue a lakaio da zével evidoh,
euz a-douez ho predeur
eur profed par din; e zelaou a rafot.
- 16- An dra-zé, end-eeun, eo ho-peus goulennet digand an Aotrou ho Toue,
war menez Horeb, da zeiz ar vodadeg, p'ho-peus lavaret:
ne fell ket deom klevet mui mouez on Aotrou, on Doue,
ne fell ket deom gwelet mui ar 'flammen-tan vraz-se,
rag ne fell ket deom mervel.
- 17- Hag e lavaras din neuze an Aotrou :
18- "komzet mad o-deus,
~~me a lakaio da zével~~ euz a-douez o bredeur, ~~ha lakin da zével~~
eur profet par dit,
va homzou ~~alakin~~ war e vuzellou,
hag e lavaro dezo kement a hourhemennin dezañ.
- 19- Ha ma vez hini pe hini ha ne zelaouo ket
ar homzou a lavaro em ano,
me, an hini a houlennno kont digantañ.
- 20- Ma vefe eur profed hag a gredfe lavared em ano
tra pe dra ha n'em-eus ket gourhemennet dezañ lavared
ha ma komz en ano doueou all,
ar profed-se a varvo.



SALM 94 /1-2,6-7, 8-9.

DISKAN : Hirio, na zerrit ket dor ho kalon,
selaouit mouez an Aotrou Doue.
pe: Eun Doue a zeu d'ho kervel...

- 1- Deom 'ta ! kanom laouen en enor d'an Aotrou Doue;
a vouez uhel meulom Doue, roh or zilvidigez.
- 2- Tostaom outañ e-kreiz ar veuleudi;
kanom dezañ salmou ha kantikou.
- 6- Deuit tre, stouom beteg an douar,
daoulinom dirag an Aotrou, or hrouer;
- 7- Rag on Doue eo, ha ni ar bobl renet gand e zorn.
- 8- Hirio eo poent deoh selaou e vouez,
na zerrit ket outañ dor ho kalon, evel gwechall er goueleh,
- 9- en deiz m'o-doa ho tadou laketa droug da vond ennon,
o klask va amproui, ha goude ma welent kement a reen evito.

SALM 94/1-2,6-7,8-9.

EIL LENNADENN. Ar vaouez a jom dizemez,
he -deus preder gand aferiou an Aotrou,
evid en em ouestla dezañ.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT 7/32-35.

- 32- Va breudeur, me ' garfe ho kweled dizour^{di} ~~ai~~, ^{dizours,}
 an den dimez e-neus preder gand aferiou an Aotrou.
 Klask a ra an doare da blijoud da Zoue.
- 33- An den dimezet e-neus preder gand traou ar bed.
 Klask a ra an doare da blijoud d'e wreg,
 ha setu eo daou-hanteret e galon.
- 34- Evelse ivez ar vaouez dimez,
 pe ar plah yaouank,
 a gemer preder gand aferiou an Aotrou,
 c'hoant he-deus beza santel, a gorr ha a spered.
 An hini a zo dimezet a gemer soursi gand traou ar bed.
 Klask a ra an doare da blijoud d'he gwaz.
- 35- O lavared kement-se e klaskan ho mad,
 n'eo ket evid ho paka en eur stign,
 med evid digeri deoh hent ar mad,
 hag evid ma vefeh unanet ~~a-bez~~ ^{a-grenn}
 gand an Aotrou Krist.



ALLELUIA, Alleluia...

Ho komzou Aotrou, a zo evidom spered ha buez.
 Ganeoh ema komzou ar vuez peurbaduz. Alleluia.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK I/21-24.

- 21- Jezuz, e ziskibien ouz e heul,
 a zigouez e Kafarnaom.
 Kenta ' ra, da zeiz ar Zabad,
 eo mond d'ar sinagog, ha rei e gelennadurez.
- 22- Souezet braz oa an dud ouz e gleved,
 rag komz a ree evel eun den, galloud dezañ,
 ha n'eo ket evel ar skribed.
- 23- Hogen, ouz e zelaou
 e oa eun den trubillet gand eur spered hudur,
 hag a stagas da grial :
- 24- - Petra ' glaskez ouzom Jezuz a Nazaret ?
 ha deuet out da goll ahanom ?
 Gouzoud a ran mad piou out :
 ar zant, sant Doue.
- 25- Jezuz a hourdrouz anezañ :
 -peoh ! Kerz er mêz euz an den-se."
- 26- Ar spered hudur a hej forz an den,
 hag ^{menul} ~~a ya~~ er mêz anezañ en eur youhal forz.
- 27- Kroget ar spont enno, an oll a houlenne outo o-unan
 -petra eo an dra-ze ? ^{petra in dra-ze?}
 setu aze eur gelennadurez nevez,
 embannet gand galloud ;
 gourhemenn a ra d'an droug-sperejou o-unan,
 ha senti a reont outañ.
- 28- Kerkent e redas ar brud anezañ
 adreuz bro Halilea.



LENNADENN GENTA. Trubuil ha poan eo lod an den war an douar.

LENNADENN EUZ LEVR JOB 7/1-4,6-7.

- 1- Job a gomzas evel-henn :
"buez an den war an douar a zo eul labour ^{devezour} gopraer,
e zefveziou, re eul labourer war hobr;
- 2- Evel eul sklavour ema o huanadi war-lerh eun tamm disheol,
evel ^{eun devezour} gopraer o hortoz e bae.
- 3- Evel-se n'am-eus bet da lod
nemed miziou a dristidigez,
ha war va hont nemed nozveziou a boan.
- 4- A-veh eet d'am gwele e lavaran ennon va-unan:
peur eta e hellin sevel ?
peur e vo fin d'an noz ?
gwasket e vezañ gand an anken beteg goulou-deiz.
- 6- Tremenet eo va deiziou buannoh eget bulzun ar gwiader,
hag eet e-biou : esperañs ebéd mui !
- 7- Dalhit sonj, Aotrou, n'eo va buez nemed eun êzennig,
ha ne welo mui va daoulagad an eürusted.



SALM. 146/1-2,3-4,5-6.

DISKAN : Meuleudi da Zoue,
meuleudi d'e ano santel !

- 1- Kanit meuleudi da Zoue, c'houeg ha dous eo e veuli.
- 2- Adsevel a ra Doue Jeruzalem,
ha boda endro bugale harluet Israel.
- 3- D'ar re ~~ez~~ glaharet o halon, e ro ar frealz,
~~ha~~ d'o goulïou ~~ez~~ ar pare.
- 4- Konta 'ra niver ar stered,
o helver anezo peb-hini dre heh ano.
- 5- Braz hag oll-halloudeg eo an Aotrou,
harz ebéd ~~ne~~ ~~ez~~ d'e spered.
- 6- Dond a ra war zikour an dud izel,
an dud fallagr avad a ziskar d'an douar.

EIL LENNADENN.- Gwaz-a-ze din ma ne brezegan ket an Aviel.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT 9/16-19; 22-23

- 16- Va breudeur, ma prezegan an Aviel,
n'am-eus ket leh da fougeal a gement-se;
eun dra red eo evidon;
gwaz-a-ze din ma ne brezegan ket an Aviel,
- 17- Mar hen grafen euz va ferz va-unan
em-befe gwir da gaoud digoll,
med n'eo ket ahanon va-unan eo her gran,
med hervez ar garg fiziet ennon.
- 18- Pedeurt digoll eo eta va hini ?
Prezeg a ran an Aviel heb klask digoll ebéd,
heb lakaad e kont ar gwir am-eus evel prezeger an Aviel.

- 19- Rag ^{dieub} libr e kenver an oll,
em-eus greet ahanon sklavour an oll,
evid gounid ar muia posubl euz an dud,
20- dister gand ar re zister evid gounid ar re zister,
En em roet am-eus penn-da-benn d'an oll,
evid savetei, kousto pe gousto, hiniennou.
23- Ha kement-se ~~a ran~~ evid an Aviel, evid kaoud va lod ennañ.

ALLELUIA, Alleluia,



Va deñved a zelaou va mouez, eme or Zalver,
me o anavez, dond a reont d'am heul. Alleluia.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK I/29-39.

- 29- O kuitaad sinagog Kafarnaüm
Jezuz gantañ Jakez ha Yann a ya da di Zimon hag Andre.
30- Mamm-gaer Simon a oa war he gwele gand an derzienn.
Heb gortez ^{gortez} pellloh e komzont da Jezuz diwar he fenn.
31- Eñ a dosta, ~~a gortez~~ en he dorn hag ~~a ra~~ ^{gortez} dezi sevel.
Kouezet oa he zerzienn hag o zervicha a ree.
32- Diouz ar pardaez-noz, goude ar huz-heol,
e oe digaset dezañ an oll glañvourien,
hag ar re ~~a oa~~ an droug-spered enno.
33- Kêr a-bez a oa bodet stard dirag an nor.
34- Ar pare a ro da galz tud
taget gand a beb seurt kleñvejou;
argas a ra kalz droug-sperejou,
ha n'o leze ket da gomz rag gouzoud a reent piou e oa.
35- Antronoz, pell araog goulou-deiz,
Jezuz a ya er mêz, hag en em denn en eul leh distro.
Hag ~~enno~~ ^{enno} ~~a~~ ^{pede} ~~eno~~.
36- Simon hag ar re a oa gantañ a ya d'e glask.
37- O veza e gavet e lavaront dezañ :
"ar ~~oll~~ ^{ar} ~~a zo~~ ^{ez} da glask ~~eman~~ ^{en} all."
38- Med Jezuz a respont : "deom ahan, d'ar hêriadennou tro-war-dro.
ma prezegin enno ivez, rag evid an dra-ze eo ez on deuet."
39- Hag e kerze dre heñchou bro Halile a-bez,
en eur brezeg an Aviel er sinagogou,
hag en eur argas an droug-sperejou.

VI° SUL "WAR AR BLOAZ"



LENNADENN GENTA.- An dud lovr a ray o annez a-gostez.
LENNADENN EUZ LEVR AL LEZENN. LEV. I3/I-2, 45-46.

- 1- E levr lezennou Israel,
e lavar an Aotrou da Voizez
ha d'e vreur Aaron :
2- -Ma sav da eun den, war e grohenn eur galedenn
pe eun darouedenn, pe eun tach gwenn,
merkou euz kleñved al lorgnez,
e vo kaset da gaoud ar beleg Aaron,
pe unan euz e vibien beleg,

a zougo dillad roget,
e vleo a vo fuillet ;
golei a rei e zremm euz an neh beteg e vuzellou,
hag e hopo : dihlant ! dihlant !

- 46- E-keit ha ma chomo beo ar gouli e vezo dihlant.
Dihlant eo, setu perag e ray e annez a-gostez,
~~e lojamant a voler mên euz ar hamp.~~ *e vo e lojamant.*



SALM. 31/1-2,5,6.

DISKAN : C'hwi hebken eo va skoazell, Aotrou Doue,
En-dro din e sav kanaouennou,
kanaouennou ar re a dennez a boan.

- 1- Eüruz ar peher pardonet,
an den dizammet ~~euz~~ *diouz* e behed.
- 2- Eüruz an hini ~~a~~ zo glan
dirag an Aotrou Doue.
5. Lavaret am-boa :
"mond a ran da anzav d'an Aotrou Doue
ar pehejou am-eus greet." *ho peh diouz*
ha ~~o hwi~~ *ho peh* ho peus va dizammet ~~euz~~ *diouz* va fehed.
- 6- Ra vo an Aotrou Doue, ho levenez !
Tridit tud just ha santel,
kanit ho levenez.

EIL LENNADENN.-

Kemerit ahanon da skouer ;
va skouer din-me eo ar Hrist.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT 10/31-II/1)

- 31- Va breudeur, kement a rit,
dibri, eva, pe n'eus forz petra all,
grit peb tra evid gloar Doue.
- 32- Na vezit ket eur skouer 'fall evid den,
nag evid ar Yuzevien, nag evid ar Gresianed,
nag evid Iliz Doue.
- 33- Grit evel don :
me, va unan, a glask an tu da blijoud d'an oll,
ne glaskan ket va mad va unan,
med mad al lodenn vrasa euz an dud,
evid ma vint salvet.
- II/1- Kemerit skouer diwarnon
evel ma kemeran skouer diwar ~~ar~~ *ar* Hrist.

ALLELUIA. Alleluia.



Me eo an hent, ar wirionez hag ar vuez..
An neb a fell dezañ kavoud an Tad a die tremen drezom-me
Alleluia.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK 1/40-45 .

- 40- Eun dervez e teuas eun den lovr da gaoud Jezuz.
Koueza ~~a~~ *a* ra d'an daoulin hag eh asped :
-ma karit, Aotrou, e hellit rei din ar pare."

- 41- Jezuz, o kemer truez outañ,
^{an} a astenn e zorn, a douchas outañ
 hag ^{lavaras} ~~alavaras~~ :
 -me a fell din, bez pareet."
- 42- Raktal e tehas dioutañ al lorgnez,
 hag e oe pareet.
- 43- Dioustu, Jezuz a gasas anezañ kuit
 en eur lavared rust :
- 44- -Taol evez ! Na lavar grik da zen,
 Med kae d'en em ziskouez d'ar beleg
 ha kinnig, evid da bareañs,
 ar pezh a hourhemenn Mbizez el lezenn :
 ma talvezo kement-se da gred evito."
- 45- Eur wech eet kuit e stagas da embann (inkanti)
 ha da vruda ar helou, en doare ma ne helle mui Jezuz
 antreal a wel d'an dud e kêr pe gêr.
 Chom a ree war ar mêz, el lehiou digenvez,
 hag euz a beb tu e teued d'e gavoud.

VII° SUL "WAR AR BLOAZ"



LENNADENN GENTA.

Doue a bardon deom, daoust d'or fallagriez.

LENNADENN EUZ AR PROFED IZAIAS 43/18,19,21-22, 24b-25.

- 18- Evel-henn e komz an Aotrou :
 -"Na jomit ket da zonjal en amzer a wechall,
 n'en em jalit ket gand an traou tremenet.
- 19- Setu emañ oh ober eur bed nevez,
 para 'ra dija, ha ne welit-hu ket ?
 Ya, digeri 'rin eun hent er goueleh,
 stériou braz en douar skarnilet.
- 21- Ar bobl-se, diorroet ganin evidon,
 a gano va meuleudi.
- 22- Koulskoude, Jakob, n'az-peus ket savet da bedenn war-zu ennon,
 rag eet out skuiz ganin, Israël !
- 24b- Dre da behejou, te a zo bet eur zamm evidon,
 dre da fallagriez ez-peus kaset ahanon skuiz.
- 25- Me avad, ya, me a bardon da fallagriez,
 dre zoujañs evidon va-unan,
 ha ne fell ket din delher sonj euz da behejou.



SALM 40/2,4,11a,13.

DISKAN : Eüruz an hini truezuz ha mad
 ouz an den e poan, ouz an emzivad.

- 2- Eüruz an neb a gemer soursi gand ar paour,
 da zevez ar reuz, Doue en delivro.
- 4- An Aotrou a ro harp dezañ war e wele a glañvour,
 ober a ra war e dro e-keid ha m'eo klañv.
- 11- Ha c'hwi, Aotrou, ho-pet truez ouzin,
 grit din sevel hag e welin emañ en ho kras.
- 13- Ha peogwir ez on didamall,
 c'hwi va harpo hag a lako ahanon dirazoh da viken.

EIL LENNADENN.- Jezuz n'eo ket bet war eun dro "ya" ha "nann",
n'eo bet morse nemed "ya".

LENNADENN EUZ EIL LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT I/18-22.

- 18- Va breudeur, ken gwir ha m'eo feal Doue,
n'oa ket ar homzou am-eus lavaret deoh "ya" ha "nann" war eun dro,
- 19- Rag Mab Doue, ar Hrist Jezuz on-eus prezeget en ho touez,
Silvan, Timote ha me, n'eo ket bet "ya" ha "nann" war eun dro,
n'eus bet ennañ nemed "ya".
- 20- Hag oll bromesaou Doue o-deus kavet ennañ o "ya".
Setu perag ivez, eo dre ar Hrist e lavarom "amen" da Zoue
evid e hloar.
- 21- An hini a ra deom beza kreñv evid an Aotrou Krist,
a-unan ganeoh,
an hini e-neus or zakret,
eo Doue.
- 22- Eñ e-neus or merket gand eur ziell
ha roet deom da arrez ar Spered Santel en or halonou.

ALLELUIA, Alleluia.

Ho komzou, Aotrou, a zo evidom spered ha buez.
Ganeoh ema ar vuez peubaduz.



AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK 2/1-12.

- 1- Jezuz a oa distro da Gafarnaüm.
- 2- Pa oe klevet edo er gêr, e tiredas kement a dud
ma n'oa ket a blas dezo, dirag an nor zoken.
Prezeg a ra dezo ar Gomz.
- 3- Setu e oa digaset dirazañ ^{eun} den seizet e izili, douget gand pevar den,
~~O weza~~ ma n'hellent ket tostaad outañ ablamour d'an engroez,
e reont eun toull en doenn azioh al leh m'edo,
hag ~~goude-se~~ e tiskennont ^{dre} an toull ar hravaz
ma oa astennet warni an den seizet.
- 5- Jezuz ~~o~~ weled o feiz ^a lavar ^{Jezuz} d'an den seizet : "Va mab,
da behejou a zo pardonet dit."
- 6- Hogen bez e oa eno etouez an dud ~~a oa war al leh~~ eun nebeud skribed
hag a lavare enno o-unan:
- 7- "Penaoz e hell an den-ze komz evel ma 'ra ? . Blasfemi a ra.
Piou a hell pardoni ar pehejou nemed Doue hebken ?
- 8- Jezuz o lenn dioustu en o spered, a lavaras dezo :
- 9- "Perag ^{ma} e ~~ve~~dit seurt soñjou en ho kalon ?
Petra ~~eo~~ an esa da ober ? *Petra 'n esa d'ober ?*
lavared d'eun den seizet : "da behejou a zo pardonet dit" *da behejou ?*
pe ~~lavared~~ : "Sav en da-zav, kemer da hravas ha kerz?"
- 10- Mad ! evit ma ouezot e-neus Mab an den ar galloud
da bardoni ar pehejou war an douar,
- 11- me a ro urz dit, emezañ d'an den seizet,
sav en da zav, kemer da hravaz ha kae d'ar gêr."
- 12- ^{Hag an} An den ~~a zavaz en e zav~~, ^{sevel} ~~a~~ ^{Kemer} gemeras kerkent e hravaz
hag ~~a yeas~~ ^{mand} er mêz a wel d'an oll;
ma oe ar bobl a bez estlammet ha ma rentent gloar da Zoue en eur lavared :
"Biskoaz n'on-eus gwelet kemend-all."



LENNADENN GENTA. Te a vo an hini am-eus dibabet,
hag a vo evid atao.

LENNADENN EUZ AR PROFED OZE 2/16^b, 17^b, 21-22.

- 16b- Setu komzou an Aotrou :
-va gwreg eet displeal em heñver,
ez an da zeseo anezi.
He zacha a rin ganin beteg ar goueleh (dezert)
hag e komz an outi kalon-ha-kalon.
- 17b- Eno e responto din evel en amzer he yaouankiz,
d'an deiz ma oa deuet er mêz euz bro Ejipt.
- 21- Te a vo an hini a zimezin ganti,
hag a vo evid atao.
Te a vo an hini a zimezin ganti,
dit e roin peb justis ha peb gwir,
gand eur garantez tener.
Te a vo an hini a zimezin ganti,
hag e vezi feal din,
hag e ouezi piou eo an Aotrou.



SALM IO2/1-2,3-4,10,13.

DISKAN. Kanom bennoz da Zoue, va ene,
kanom bennoz da Zoue.

pe : Mad ha trugarezuz oh va Doue

Mad ha trugarezuz oh ... kantikou IO. diskant.

- 1- Lavar bennoz da Zoue, va ene,
kement a zo em hreiz, bennoz d'e ano santel !
- 2- Ya, va ene, lavar bennoz d'an Aotrou,
na zizonj morse e oll vadoberou.
- 3- Eñ an hini a bardon dit da oll behejou,
a bare ahanout a beb kleñved.
- 4- Eñ an hini a ziwall da vuez diouz ar maro,
a ra dit eur gurunenn gand e vadelez hag e drugarez.
- 10- N'eo ket hervez or pehejou e ra en or heñver,
n'eo ket diouz an droug a reom e kastiz ahanom.
- 13- Evel m'e-neus eun tad kalon dener ouz e vab,
evel-se an Aotrou Doue evid an dud a zouj anezañ.

EIL LENNADENN.- Kannad an Aotrou Doue eo sant Paol.
Gwella kred evitañ eo ar gristenien
e-neus gounezet d'ar feiz.

LENNADENN EUZ EIL LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT 3/1-6.

- 1- N'on-eus ezomm ébéd evel lod 'zo,
euz lizeri-kred, da ziskouez deoh pe da gaoud diganeoh.
- 2- C'hwi oh-unan eo al lizer-ze skrivet en or halonou,
hag a hell an oll lenn hag anaoud.

3- Sklêr eo ez oh al lizer deuet a-berz ar Hrist,
ha fiziet ennom,

-60

Skrivet n'eo ket gand liou du,
med gand spered an Doue beo,
n'eo ket war daolennou mên,
med war taolennou kig ho kalonou.

4- Setu an asurans on-eus dre ar Hrist, dirag Doue.

5- Drezom on-unan, n'om ket gouest da lakaad tra pe dra
war or hont, evel pa vefe ahanom on-unan.
Nann, euz a Zoue eo e teu or galloud.

6- Eñ eo e-neus rentet ahanom gouest da veza ministred
an emgleo nevez, ha n'eo ket hini al lizerenn eo,
med hini ar Spered, rag al lizerenn a ro ar maro,
ar Spered a ro buez.

ALLELUIA, Alleluia. Tad, mestr an neñv hag an douar,

Mt. II/25



me ho meul da veza kuzet kement-mañ
ouz an dud fur ha speredeg
ha roet da anaoud d'ar re vian.

AMEL JEZUZ-KRIST HERVEZ SANT MARK 2/18-32.

18- Dervez yun a oa gand diskibien Yann hag ar Farizianed,
hag e teujent da houlenn ouz Jezuz :
-perag ne yun ket da ziskibien dit-te,
p'ema o yun diskibien Yann ha re ar Farizianed ?

19- Jezuz a respontas :
-daoust ha deread eo da gompagnuned an den nevez
yun e-keit ha m'ema ganto ?
Endra m'ema an den nevez ganto
n'eus tu ebed dezo da yun.

20- Eun amzer a zeuy avad hag e vo lammet an den nevez diganto
en deiz-se, e yunint.

21- Ne zeu nikun da bentselia eur wiskamant koz
gand eun (tamm) pensel nevez ;
a-hend-all ar pensell nevez a zach war an danvez koz,
hag a rog anezañ gwasoh.

22- Pe c'hoaz, ne laka nikun gwin nevez e sehier-ler koz,
a- hent-all ar gwin a laka da darza ar zehier,
ar gwin a vez kollet, koulz hag ar zehier ;
evid gwin nevez sehier nevez.



